



Troomp ha troomp atav !

Istor(ioù) ar c'hampouezh
e Breizh



LIVE 2
ADALEK 7
VLOAZ

Sekredoù ar grampouezhenn aet da goll !

LEVRIG-C'HOARIOÙ

Degemer mat en diskouezadeg **Troomp ha troomp atav !** *Istor(ioù) ar c'h rampouezh e Breizh e mirdi breizhek an departamant*



Ha gouzout a rez treiñ ur grampouezhenn ? E Bro-C'hall e vez graet a-wechoù evit ar Chandelour, evit degas chañs ! E Breizh, avat, n'eo ket ken aes-se... Perak ? Abalamour ma vezont fardet war ur blakenn vras, pounner-tre, hag a vez graet pillig anezhi.

E Breizh eo pouezus-tre fardañ ha debriñ krampouezh. Un hengoun eo hag a vez graet a-rumm-da-rumm er familhoù pell zo. Pep hini e zoare d'ober : kalz rekipeoù ha jestroù a bep seurt zo !

En diskouezadeg-mañ e ri anaoudegezh gant traoù, ostilhoù hag istorioù hag a denn d'ar c'h rampouezh. Deskiñ a ri ez eo ar c'h rampouezh un afer jestroù, sekredoù ha mareoù da vevañ asambles dreist-holl.

Ha diwar vremañ emañ-te ivez en avantur lipous-se !

Gweladenn vat dit !



**Arabat eo dit ankouaat kemer ur
follenn hag ur c'hreion paper ganit.**

Er Mirdi ez eus un nebeud
reolennoù d'ober ganto :

- Arabat dit tostaat re ouzh an oberennoù
- Arabat dit touch d'an oberennoù
- Arabat dit diskouez un dra bennak gant da greion



Met er Mirdi e c'hallez ivez :

- Kaout plijadur, sellet
- Hunvreal, pourmen, treiñ ha distreiñ
- Sevel goulennoù
- Chom hep gweladenniñ pep tra ?



Da grefridi : Treuziñ ar mareoù ha saveteiñ ar c'h rampouezh !



Gras d'al levrig-mañ ha d'ur veaj war-gil en amzer emañ o vont da « zastum » kement tra a zo ezhomm evit fardañ AR grampouezhenn wellañ... hag evel-se saveteiñ ar c'h rampouezh da viken !

Kontañ a reomp warnout evit mirout ganit ar pezh a gavez gwelloc'h eus pep mare.

Ne vo ket ar memes tra ganit evel gant da amezeg marteze (ha n'eo ket strikt !). Amañ n'eus ket respontoù fall !

Sell mat er sal-mañ evit gwelet an holl armoù-kegin az po ezhomm anezho evit fardañ krampouezh lipous.

**Ma c'hallfes kas 2 arm-kegin ganit hepken evit fardañ
da grampouezh, pere a gemerfes ?**

Skriv o anv amañ dindan ha tres anezho.



.....

.....

Deomp er sal war-lerc'h bremañ...

Degemer mat en ti-krampouezh



En tiez-krampouezh e kaver alies traoù kozh hag a vez implijet en ur mod all evit kinklañ ar salioù. Listri pe arrebeuri hag a zegas da soñj eus gizioù gwechall, met ne vezont ket mui implijet er memes mod.

Klask an traoù amañ dindan ha divin da betra e servijet a-raok dont da ginklañ un ti-krampouezh.

Ask ar respontoù mat. (Evit sikour ac'hanout emañ ar c'harteloù, an testennoù e-kichen)



An talbenn-mañ a oa :



Ur gwele-kloz



Un daol



Ar c'hantolor-mañ a oa :



ur marc'h-loiaioù



ur marc'h-fourchetezoù



Ar vasin-mañ a servije :



da ober ar c'houez



da boazhañ ar yod diwar bleud ha dour

E-touez ar poltreoù, eus an 19^{vet} kantved, ez eus unan hag a rankez dastum hep gortoz ; kavout a ri anezhañ lec'h ma kaner ar c'hrampouezh...

Skriv da anv amañ dindan ha diskalk an dra-se war da follenn paper kalk.

Pegañ a ri anezhañ amañ er sal diwezhañ.

.....

Mirdi Lipous



War ar blasenn vras-se e Kemper emañ deiz ar marc'had.

Gwelet a reer an dud gant o dilhad, gwelet e vezont o tañsal, o werzhañ traoù, o seniñ... hag o tebriñ ivez !

Bez' ez eus ur grampouezherez kuzhet en un tu bennak en daolenn-se.

Ha kavet ez peus anezhi ?


Mazaouet eo bet an daolenn-mañ. Klask ha kelc'h ar 5 kemmm etre ar skeudenn amañ dindan hag an daolenn a zo er sal.



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...



Taolenn vev



Mont e-barzh an daolenn !

Kerkent ha deuet er-maez eus mirlec'hiou Mirdi an Arzoù-kaer e Kemper ez eus deuet buhez e tudennoù an daolenn...

Sell mat ouzh ar film bannet evit gallout « dastum » an aozenn na c'halled ket ober hepti e 1866 hervezout.

Dibab anezhi mat, skriv hec'h anv amañ

.....
ha tres anezhi :



Emaout dirak ar skeudenn gentañ ma weler krampouezh da werzhañ !

Ro livioù d'an daolenn gaer-mañ en-dro.



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...



Eus ar greun

Ul liamm start zo etre al labour-douar hag ar boued. Paneve al labour-douar n'eus ket eus ar boued, ha diwar-se krampouezhenn ebet !

Peseurt benveg a gasfes ganit evit tapout greun gwinizh en un doare efedus ?

Kelc'h da respont.



Rastell ar greun



Pal ar greun



Freilh

A-raok kaout bleud e ranker tremen dre veur a bazenn gant ar plant.

Sell ouzh al luc'hskeudennoù amañ dindan ha laka ar pazennoù en urzh mat ha ro bep a niverenn dezho eus 1 da 3.



d'an asied



E deroù an 20^{vet} ne veze ket gounezet ar memes plant bepred er parkeier e Breizh gant ar beizanted. Lakaat a raent an trevedoù da dreiñ, d'an douaroù da vezañ strujus bepred.

3 fark az peus. Er sal, klask an 3 flantenn a blijfe dit gounit. Tres anezho war da follenn paper kalk. Pegañ a ri anezho amañ, er sal diwezhañ. Skriv o anv en o c'hichen.

.....

.....

Gant bleud diwar ar plant-se e vez graet ar c'hrampouezh. Gallout a reomp implijout kement seurt bleud a zo evit fardañ krampouezh. Pe hini a vefe implijet ganit ?

.....

.....

Arkeologiezh ar c'hrampouezh e Breizh




Emaout o paouez punañ an amzer hag en em gavez bremañ war-dro 500 vloaz zo...

Deus da vezañ danvez arkeologour ha klask ar pezh a brou e veze graet krampouezh d'ar mare-se !

Klask ar plad torret hag adsav anezhañ.

Tres anezhañ er c'helc'h



War ar plad-mañ e oa bet kavet roudoù boued kozh-douar gant an arkeologourien. Diskouez a ra kement-se e veze graet krampouezh warnañ...

Ur wech adsavet ar gleurc'h e c'hallez gouzout petra eo ar roudoù-se ha kavout petra eo an aozenn gevrinus ! Implij ar binvioù a zo ez kerz.

Skiv e anv :


Taol evezh, 2 c'her zo skrivet...

*Deomp d'al lec'h diwezhañ,
war-zu ar pignereziou...*



Gant al lizherennoù a ya d'ober anv an aozenn gevrinus emañ ar c'hod da zigeriñ ar c'houfr a zo er sal diwezhañ. Ennañ emañ ar sekred.

Er c'houfr-se e kavi peadra da leuniañ ar c'helc'h amañ dindan.




Arabat ankouaat didroc'hañ ha pegañ ar skeudennoù dikalket ganit ez levrig skeudennoù.

Ur sizhaih ha peg zo ez kerz.



*Gant ar pezh a zo bet dastumet ganit a-hed da weladenn
e c'hallez, diwar vremañ, fardañ krampouezh bemdez
kuit dezho da vont da goll biken !*



**Evit echuiñ e c'hallez
tresañ ar grampouezhenn
a gavez gwell amañ.**



*Trugarez dit ha ken
ar wech all !*

Evit lenn hor c'heleier ha reiñ da c'houzout ar pezh
ho peus bevet : cdp29.fr
Eus ar Meurzh d'ar Sul : 10e-6e noz
Digoust d'ar Sul 1^{añ} eus ar miz

 musee.departemental.breton
 musee.breton

Hor c'heleier :

